

**RIMOU**  
HA  
**GOULENNOU**  
*EVIT AN EUREUJOU.*



E MONTROULEZ,  
E ty LÉDAN, Impr., e traòn ru ar Vur.





# RIMOU,

## DISCOURSIOU HA GOULENNOU

### EVIT AN EUREJOU.

*Discours pa zêr da bedi da eun Eured.*

**S**ALUD d'èc'h oll, compagnunez,  
Dre ar zalud e commançàn va devez.

Me a zo deut da doull ho tor

Gant calz a joa hac a enor :

Antreet joaüs en ho ty

Gant eur c'hoant vras d'ho saludi.

Da Zoue e rentàn ar zalud humblamant,

Ha goude me ray va c'homplimant.

Piou eus an ty-màn a bedin-me da guenta?

Pedi a ràn ar mestrou ha qement zo ennà :

Mar deus domestiqet en ho ty,

En o fedàn ive qercoulz ha c'houi;

Rac re a labour am be-me

O pedi an eil goude eguile

Da zonet hep faut da eur Banqet

A vezo evidomp prepalet

Gant *Mari Lipiq* ha *Yan Baron*

Pere ho ped ganemp-ni a greiz calon :

Fixet eo an devez da Zemeurs qenta;

Rac-se, mar plich ganéc'h, deut oll da asista.

En *Plouyan* vo an Eured hac en ty *Flampe* ar Banqet :

Mar plich ganéc'h en em gafet hac e vimp contant rentet.

Me ya da gonta d'èc'h eur veach :

Dont a reot da.... da guemer ar plac'h;

Ac'hane e vezo conduet d'an Ilis,  
 Betec an Auter, evel ma zêo requis  
 Evit ober eur memes contrad  
 Evel a eure goechall he mam eus hé zad.  
 Eno neuze e vezint eureujet  
 En presañ Doue hac an asistantet,  
 Gant solanite vras an Ilis.

Comzomp brémàn en bër divis :  
 Me eo an hini a zo choaset  
 Da bedi evit ar Plac'h a Eured,  
 D'e fedi ha d'e enori,  
 D'e asista da eureuji.

N'ouzon get sur a Gomplimant,  
 Ia n'oun get custom da barlant;  
 Des yaouanq òn, hac e tesqin :  
 Ar plich ganêc'h va excusin.

Qer brao oc'h eus lemmet ho téod,  
 Evel eur falc'h da drêc'hi yéod.

'houi oc'h eus eur sac'had langach,  
 Ia n'en dêo get allamagnach.

'reparet oc'h eus ho tiscoursiou,  
 Ia studiet mat ho rimou;

Ies abars ma viot er penn e vezo tom ho chageden.

Ni zo o clasq eur goulmic venn hac a ra hon anqen;  
 'houi a elfe renta rêson  
 comp-ni diouti, va mignon.

Pa gomzit eus a goulm, oc'h en em goall gavet :  
 To gentel a ouzoc'h, ha caer e zêo rimet.

Ia vijen bet er c'hademi,

Ie a rêsonje coulz ha c'houi,

Hac a deuje eun tol latin

uzoc'h dre ma zoc'h eur potr fin.

Eun den yaouanc zo en hon touez abaoue pemzec dez,  
 n devoa arêtet da bares eur plac'h cusho compaguenez;  
 ez e tle beza anavezet :

n e' scoaz cleiz e zeo blesset.

Santout a rân, dre ho comzou,  
 Coulz evel dre ho complimanichou,  
 Ho poa ezom eun dra benac;  
 Me meus em zy eur vanden vat  
 A c'hraquez coulz ha plac'het,  
 Mes neus nicun ané blesset.

Ar blesseur en deus ar plac'h-se  
 A vezo certen prest pare,  
 Hac he servicher, coulz hac hi :  
 Digassit-hi deomp deus ho ty;  
 N'ho pezit morse nep chagrin,  
 Pareet vo hep dale fin.

Evit contanti ho speret  
 Me a ya etouez ar merc'het.  
 Cetu amâ unan dirazoc'h,  
 Ma na bllech déc'h, difecil oc'h;  
 Eur vaouez adret ha lijer,  
 Hac a voar bravic e micher.

En em lacat a rit en risq  
 Da gaout eun affer meurbet trist;  
 Evit beza ar vreg-se en ho ty,  
 Na ellit qet dispos diouti.

Me a vel, n'ouffec'h qet e nac'h,  
 E fell déc'h sur gûelet hor plac'h :  
 Cetu amâ eur plac'h yaouanq  
 Jentil ha coant, guyé ha galant :  
 N'eus goas er seiz parros tosta  
 A refuse certen houmâ.

N'eo qet da veza refuset,  
 Ma vije din-me permettet.  
 Plac'hic yaouanq, savit ho penn  
 Da zellet ouz ar gristenien :  
 Abars nemeur, me a esper,  
 Ho pezo eur gûir servicher.

Me gred e zoc'h re importun,  
 Hac e chomfoc'h sur he, nicun.

Güelet oc'h eus ha plac'h ha greg :  
Ha n'eo qet contant ho speret ?

Arça eta , va mignon bras ,  
Qent ma quittäimp-ni ar plaç ,  
Digassit deomp ar Plac'h Nevez ,  
Gant cònje he zud hac he lignez ,  
Evit laouennâd he fried ,  
A zo meurbet goall gontristet .

Goulen a reomp a galon vad ,  
Gant oll bennos ha mam ha tad ,  
Hac e oll guerent , CATHEL AN DOURDOUS ,  
Ha YAN GUNDU , gant e doc plous ,  
Da vont d'an Ilis da eureuji ,  
Evit achui an dimezi .

Qer brao , va mignon , e comzet ,  
Ho refusi na-ellân qet :  
Brémaic souden , en eun istant ,  
Me laçai ho speret contant ,  
O presanti dêc'h an objet .  
Ha n'eo qet mez sur e güelet .

Cetu amân eur fumelen  
Qer caer evel eur giroflen ;  
N'eus na fourdilis , na levant  
Evelti qer rejouissant :  
Avancit eta , Den Nevez ,  
Evit rêi an dorn d'ho mestrez .

— Didostait eta , va mignon ,  
Bremâ demeus a greiz ho calon ,  
Da ziguemeret ho pried , ha dalc'hit mat dezi bepred ,  
Er c'hlenvet hac ar yec'hed pa viot unisset .  
Neo qet qer fall ho qevridi ,  
N'antrecot sur ebars en ty  
Da benn an daul vit e c'herc'hat :  
Iraç dêc'h ho taou da veva ervat  
E doujanç Doue , m'o recevo  
En e c'hloar goude ho maro .

*Amàn e peder ar Bederien da antreal en ty  
ha da zevel ouz taul.*

AR PLAC'H YAOUANQ.

Silanç eta, Compagnunez,  
Ma parlantìn evit ar plac'h a Zevez.

Dre ma zavàn ebars em za,  
Excus diganéc'h a c'houlennàn.

*Mari Lipiq* e deus va feded  
Da eva eur banne d'e yec'het.

Peb action gaër, pa er gràn,  
Dre Sin ar Groas er gommançàn :

*En hano an Tad, ar Mab, ar Speret Gloan,*  
Tri Ferson distinct en unan :

Da Zoue ar zalud da guenta,

An eil d'an Itron Varia,

An drede d'ar Zent ha d'an Æle,

Déc'h-hu, compagnunez enorabl, e presantàn'r bêvare,

Evit ar boan oc'h eus bet,

E zàn da rei déc'h peb a voqet,

Fini a meus dastumet er Jardin a Eden,

En eur c'haread fleur, pa voan enni o pourmen :

Da guenta d'ar Véleyen e roàn ar bec'herien,

Dre ma zint o Fastoret hac o Gouarnerien;

Goude d'an Dud-Chentil ha d'an Noblanç,

Pa e meus an enor da barlant en o fresanç;

E roàn ar gurunen spern

A zougas Mab Douc, p'or prenas eus an ifern,

Evit ma teuyo da biqat o ene,

Ha ma vezint ferm da zouten ar Fe;

Déc'h-hu, tud demezet, ezac'h ha graguez,

E roàn ar vezen a vuez,

Rac en deillou me meus bet remerquet

Ar c'homzou precius eus ar baciantet.

Ha c'houi, goazet yaouanq, m'ho ped da imita

An Autrou S. Joseph, pa voa var ar bed-mâ.

Ha ni, merc'hed yaouanq, laqomp hor fantasi  
 Da enori ar Verc'hes, pini a hanver Mari :  
 Imitomp he fervor ; beza e zeo ive  
 Rouanez an douar hac ivez eus an êe.  
 Me zo en em velet hirio eus a eun dra,  
 Ha n'en dòn gouiapl na capapl aneâ ;  
 Rac me zo eur plac'h yaouanq ignorant,  
 Hac e meus nebeut a sqiant ;  
 M'am bije bet eun tam disqamant,  
 M'em bije têod avoalc'h evit parlant.  
*Mari Lipiq*, mignonet, hirio sur a lavar  
 N'eus nicun er gompagnunez n'e c'har :  
 Mes ar re e enor o tout d'e asista,  
 Eus ar re-ze sur e deus calz a joa ;  
 Mes eun all zo ordronet dei da garet ;  
 Cetu amâ e hano : *Yan Baron* e zêo hanvet.  
 Arça ta, Compagnunez enorabl, me ho ped,  
 Pa zomp amâ oll en em rassamblet,  
 Eun tol chanç e ve demp en em gafemp james,  
 Hep mancout hini ebet assambles.  
 Ne meus na pouvoar, na gallout  
 Ña ober rêson d'êc'h-hu tout.  
 Mes brémàn e zàn da eva eur banne  
 D'ho yec'het oll an eil hac eguile.

*Eva ra eur banne da yec'het an Den Yaouanq.*

Me ya c'hoas da eva eur banne  
 Da yec'het an Den Yaouanq ive :  
 Hac evit ma vezo ganéc'h anavezet,  
*Charlezic Mistiflor* e zêo dre oll hanvet.  
 D'êc'h-hu-ta, *Mistiflor*, brémàn e requetàn  
 A bep seurt madou er bed-màn,  
 Hac oll souët var ar bed, mar dê gant Doue destinet.  
 Ma vijen tenzorierez var oll tenzoriou ar bed,  
 A netra ne vijec'h refuset ; mes Doue en deus gouarnet  
 Evit bea er bed meulet : evomp eur banne d'hor yec'het.



*Discours evit goulen eur Plac'h Neve da eureuji,  
gant ar Respont conform evit e rei.*

*Goulen.* Debonjour déc'h, Compagnunez,  
Salud gant laouenidiguez ;  
Pa ho quèlàn aze assamblet,  
Dibreder ha qer brao gùisqet,  
E credàn mad oc'h eus amzer  
Da zelaou eun daou pe dri guer.  
Ni a zo amàn tremenedi,  
Carguet demeus a guevridi :  
Lavarit demp eta bremàn  
Peseurt hano en deus ar guèr-màn.

*Respont.* Ni a rent ar memes salud  
Déc'h oc'h-unan coulz ha d'ho tud.  
Sansipl omp d'ho complimantchou,  
Coulz ha d'oc'h oll reverançou,  
Hac hon eus calz a interest  
Da supposi oc'h tud honest ;  
Mer mar deo tremen e fell déc'h,  
N'hon eus affer abet ganéc'h.

*G.* Ouz ho clévet o parlant,  
Me gred oc'h eus calz a dalant,  
Hac e velàn ive ractal  
E zoc'h sur en gout da farçal,  
Pa zéq güir na respontit qet  
D'ar pez a meus goulennet ;  
Mes ni a zo deut eus a bell,  
Ha mar chomomp-ni discabel,  
Ec'h alfemp-ni goude c'hoezi,  
Dont da drapout eur pleurezi.  
Rac-se, permett demp souden  
E c'holofemp brémàn hor penn :  
Mar cavit eo ze diféçon,  
Lavarit demp-ni ar réson.

*R.* A viscoas e meus bet clévet

Eo fall pennou loe avelet ;  
 Ha mac'h attrappit pleurezi,  
 N'em em glemmit qet ouzomp-ni :  
 Beza oc'h eus pep liberte,  
 Grit ta diouz ho commodite.

*G.* Penos etal va güir vignon,  
 Me ho cav eun den aféçon,  
 Hac e laqen ebars em speret  
 E vijen bet ganéc'h pedet  
 Da laqat an tan var va fiben,  
 Dre ma zomp güir amezeyen ;  
 Neuze souden , en eur fumi,  
 Me a lavarje va c'hevridi ,  
 Hac er fin neuze va C'hompliment ,  
 Ha mar bije d'ho santimant ,  
 Ho pije bet ar civilite  
 Da offr eun tam hac eur banne.  
 Ma vijec'h bet qen aviset ,  
 O pije sur calz gonezet,  
 Rac me a dleye ho pedi  
 Da zont ganemp da zijuni ,  
 Ha goude ze c'hoas da leina ,  
 Hac erfin goude da goania ;  
 Met pa na rit demp qen enor  
 Nemet da zivoal toul ho tor ,  
 Ha chom qer fier en hoc'h èz ,  
 Evit hon delc'hi-ni ermèz ,  
 N'en doc'h-hu qet eun heretiq  
 Pe mab d'ar fals-pinvidic ?

*R.* Selaouit mad , va c'hamarad ;  
 En em entent a gaffen mad.  
 Ni hon eus güelet avichou  
 Certen tud a vandennou  
 Oc'h antren ardiamant amâ ,  
 Hac o tonet da zifframma  
 Qig hac anduill , lin ha qig sall ,

Crampoez, ha calz eus a draou all;  
 Hac eo ret mad deomp, goude-ze,  
 Delc'hel hon ty en surete.  
 Allas! ni ne ouzomp doare  
 Ha c'houi a vez eus ar seurt tud-se;  
 Gouscoude mar doc'h scuis en ho sa,  
 Ha c'hoant déc'h-hu da azea,  
 Me royo déc'h eur voutez prenn :  
 Azeit unan en pep penn;  
 Neuze, hac e vec'h-hu ermèz,  
 E parlantot güell en hoc'h èz.

*G.* Mar deo difianç ho laqa  
 D'hon trêti er féçon-mâ,  
 E tislêryan déc'h a bouez penn  
 N'omp qet ar seurt friponerien,  
 Laeron anduill ha qig sall,  
 Na troyadellerien all,  
 Mes hon deveus commission  
 Conform d'hon Religion;  
 Rac merqet eo ebars er Scritur  
 Penos güeachal eun den fur  
 A voa hanvet Eliezer,  
 A ras ar memes micher;  
 Ha penos, hervez an histor,  
 E voe trêtet gant calz enor.

*R.* An histor-ze sur, va mignon,  
 A verit calz attantion.  
 Eun talant demeus ar c'haera  
 Eo gouzout en em explica.  
 Hac erfin eus ho compliment,  
 Mar bezit eus hor santimant,  
 Ni a velo petra da ober,  
 Hac petra ras Eliezer;  
 Pe mar er c'herit, da guenta,  
 Livirit petra voe grêt dezà.

*G.* Eliezer, va mignon qès,

Ne voe qet bet lêzet ermès :  
 Deputet e voe gant e vest,  
 Evit pini en d'œa interest,  
 Da glasq eur plac'h voa destinet  
 Gant Doue evit pried  
 Da Isaac, den yaouanq flam,  
 Ha mab unic da Abraham.  
 Evelse dre urz an Tad,  
 E partias mintin mad,  
 Hac ec'h antreprenas joaüs  
 Eur veach hir ha fatigus,  
 Var zu ar Mesopotami,  
 Hep gouzout hent ebet da vont dy.  
 Mes pa ignorer an hentchou,  
 E rër mad var boes goulennou.  
 Evelse pa zòn êruet amàn,  
 E c'houlennàn hano an ty-màn.

*R.* Ho! ma vije deut hennes amàn,  
 Ni hor bize poqet dezàn;  
 An den-ze, var a lavarit,  
 A voa eun den leun a verit;  
 Mes bremàn eus eun amzer all,  
 Hac e vale calz a dud fall;  
 Bremàn e veler bizier-balan  
 Prest da grevi gant bêr-alan,  
 Oc'h invanti niver traou  
 O clasq laqat güir ar gaou;  
 Uza a reont tout o adres,  
 O prometi môr ha menes :  
 Eun den a lavar calz a draou,  
 Ne zint peurvuia nemet gaou,  
 Mar doc'h eur gascon evelse,  
 Troit ho qein pe it adre.

*G.* An hini a zo va model,  
 A voa güirion ha fidel,  
 Clêvit c'hoas daou pe dri guer,

Var gampagnou Eliezer,  
 O veza bet pedet Doue  
 D'e gundui en demarch-se,  
 Ec'h éruas directamant  
 Elec'h ma edo ar plac'h yaouanq;  
 Caer evel eur stereden, en eur famill an honesta,  
 Tud demeus ar re charitapla.  
 Pedet e voe da vont en ty,  
 Qinniguet dezàn da zèbri;  
 Mes èn a lavaras a grenn  
 Ne guemerje nep brienen  
 Nemet goude explica  
 An urzou voa roet dezà.  
 Aman ive, va breur qer,  
 Ne rit qet deomp coll' hon amzer :  
 Deut omp gant an intantion  
 Evit ar memes commission,  
 Hac e zeo deomp-ni revelet  
 Emedi aze hon reqet.  
 Caer ho pezo dissimuli;  
 Ilor plac'h a zo ebars ho ty :  
 Lavarit dêi e mòn amâ  
 Gant an hini a gar ar muia  
 Demeus an oll grouadourien  
 Pere a vev hac a dremen,  
 Hac én eo a bed anezi  
 Da zont brêmàn da gontracti,  
 Evit beva ervat assambles  
 Ar rest demeus o oll buez.  
 N'en em arrêtàn qet da veuli,  
 Da fougueal, na da bompadi;  
 Ni a voar ervat manifiq  
 Peguer mad eo, peguer pinvidiq;  
 Anfin eun den eo eus ar güella  
 A guement a zèbr bara.



## DISCOURS

*Evit goulen eur plac'h da zemezi, m'ar be ar banget elec'h  
ma emedi ar plac'h, ha mar be goulennet goude dijuni.*

**G.** Abars ho quittä, Compagnunez,  
E trugarecàn ho madelez  
D'hor beza recevet en ho ty;  
Ha roet deomp da zijuni,  
E tislériàn e zòn carguet  
Da bresanti dec'h eur reget.  
Laquet òn en penn ar vanden,  
Hac e zeus c'hoant e parlantfen;  
Hanzavi a ràn gouscoude  
Oun indign eus an enor-ze,  
Dre na meus qet a dalant,  
Discadurez, na calz sqiant.  
Ar pez a deu d'am hardissât,  
Eo ma credàn e zoc'h tud vad,  
E viot prest d'am excusi  
Ma teufe dìn ober fasi,  
En despet d'am intantion,  
D'ober mad va c'homission.  
Rac-se, mar permett dìn,  
Digompliment ec'h exposin.

**R.** Disqueus a rit mil act a humilite  
Ha qement a civilite,  
Ma veritit sur gant réson,  
E rofemp dec'h hon attantion.  
Pinvidic ha den honest;  
Beza savant ha modest,  
Zo qaliteou ar re gaera,  
Mes nonpas ar re gommuna,  
Ha gouzout trugarecât  
Evit ar servichou mad,  
N'eo qet certen an hent fall  
Evit obten c'hoas re-all.

Parlantit eta hardiamant,  
 Hac exposit ho santimant,  
 Ha diouz ma zêo ho commission,  
 Ni a vo prest da entent rêson;  
 Mes manifiq e ve parlanter  
 Hac e ve hor pennou goloet.

*R.* Beza e meus hirio an enôr  
 Da bresantj dirac ho tor  
 Eun den yaouanq leun a farnez,  
 Ha demeus hoc'h anaoudeguez;  
 Eur merq bras demeus a sqiant,  
 Eo m'en deus preferablaman  
 Choazet unan eus ho merc'hed  
 Evit beza e bried.

Gouzout a rit e zêo dija  
 Publiet teir gñech ar bromessa,  
 Ha n'hon deus den clêvet parlant  
 Eus a nep seurt ampechamant,  
 Nac e vet en em opposet  
 Da retardi an eured;  
 Rac-se omp deut d'e fedi  
 Da zont hirio da contracti.

*G.* A tao diouz costez ar vaouez  
 E ve clasqet mil digarez,  
 Ha na ouffac'h qet evit petra,  
 Nemet evit delc'hel an dud en o za.

*R.* Ne glasqan qet digareou,  
 Mes exposi va rêsonniou;  
 Gortoz a ranqit, rac'ar mab eus an ty  
 En deveus goall faoutet e fri,  
 Nonpaz ouz en em ganna,  
 Mes o fourra butun ennâ,  
 Hac e zêo redet d'ar marc'hat  
 Da glasq eun ados d'e c'hriad.  
 Mes da c'hortos ma teuy d'ar gueur,  
 Rac ne zaléo qet, mévar,

En deus va dalc'het me amàn,  
 Evit ma respontin evitàn :  
 Rac-se e tislériàn dèc'h,  
 Ententit mad mar plich ganéc'h,  
 Ret e ve pare mad e fri  
 Abars cass ar plac'h da eureuji,  
 En aon na ve ar béleg spontet  
 O velet eur fri qer faoutet.

*G.* M'en divije lavaret dìn-me,  
 E voa bet qùit da vont qeit-se;  
 Ia, rac me a voar para  
 Gant remejou ar re zrolla.  
 An deiz all va marc'h du,  
 Eur marc'h mad, en creiz e fru,  
 A voe roguet e groc'hen  
 Gant eun tol dant digant eun azen :  
 N'ho pije birviquen devinet  
 Gant petra e meus e bareet!  
 Gant eun tam qic-sall d'e beinseillat,  
 Hac eun anduillen d'e c'hriad.

*R.* Credit dìn, o redet bro  
 E tisquer traou névez atao.  
 Pa voan er Spagn en arme,  
 Eun devez ma voa calz arne,  
 Abars an eost en nevez-amzer,  
 Ec'h éruas eur goal affer.  
 Eur vreg gant eun aër a voe flemmet,  
 Tout e zud a voe calz nec'het :  
 Facil e sònjit eo ar vreg a varvas?  
 Mes nan, an aër hepquen eo a grevas.

*G.* Me n'en dòn qet eus an dud habilla,  
 Mes adress mad a meus da scrifa :  
 Qenta lizer a scrifis biscoas  
 A voe scrifet gant eun aval poas,  
 Ha goude va gùella pluen  
 Zo bet eur picol anduillen.



Ha gant qement-se tout,  
 Me a meus bet grêt calz a rout :  
 Ha pa bresantàn eur reget,  
 E vezàn diouc'h-tu selaouet ;  
 Ha ne bresantàn qet bremàn  
 Beza daleet reir amàn.

*R.* C'houi a zo savet goal mintin  
 Da laqat an dud da c'hoarzin :.  
 Mes an amzer a ya en dro,  
 Rac-se hastomp buan a fo.  
 Ia, eur gascon en deiz all  
 A ras eun dro ne voa qet fall,  
 Rac evel m'en devoa clêvet  
 Voa qestion eus eun eured  
 Gant famillou a gonseqanç,  
 Tud pinvidic hac a bresanç,  
 E vije manic dezà  
 Mont ive di da leina.  
 Evel m'en devoa calz a speret,  
 Ne voe qet pell ambarrasset  
 Evit caout prest eun digare  
 Da gomz ouz tad ar plac'h neve.  
 Ar gompagnunez a voa éruet,  
 Ha den mui na c'hortoet.  
 Neuze ec'h antreas ar gascon,  
 Gant reverançou a fêçon ;  
 Anfin, scuis bras o saludi,  
 E lavaras da vestr an ty :  
 Me meus evidoc'h eun affer pressant,  
 A ell talvout déc'h calz a arc'hant ;  
 Fachet òn d'oc'h interrompi,  
 Mes ne qet eun dra da differi.  
 Ar mestr a lavaras d'ar gascon :  
 Chommit da leina, va mignon,  
 Ha goude-ze, var hon abaster,  
 Ec'h ententimp ouz hon affer.

Pa voë grêt ar rëgal tout ,  
 Ha deut ar poent da vont er rout ,  
 Ar gascon neuze a lavaras :  
 Cetu amâ an affer bras.  
 Gant ho merc'h e meus bet clêvet  
 E prometit rêi canç mil scoët ;  
 Mes , mar qerit , me c'hemero  
 Gant an anter eus anezo ;  
 An anter all a chom ganéc'h ,  
 Cetu eur gounit sclër caër déc'h ,  
 An tad ne gavas qet dereat  
 Beza evelse goapeat  
 Credabl é en em fachas ;  
 Mes ar gascon a bartias ;  
 Buan e renças trei e gucin ,  
 Mes attrapet en doa e lein .

*R.* Ni nomp qet gasconet ,  
 Mes tud sincer , güir Vretonet ;  
 Neo qet leinou eo a glasqomp ,  
 Mes ar plac'h neve a c'houlennomp .  
 Me gred oc'h eun den ar güella ,  
 Ha ne ve qet mad ho trompla ,  
 E ve pec'het oc'h amusi  
 Ha memes dont d'ho talei ;  
 Ar pez ze êruet ganéc'h ,  
 Am gra calz nec'h , m'en assur déc'h .  
 Abaoue dec'h ho plac'h yaouanq  
 E deus chenchet a zantimant .  
 Me a voa êt demeus ar vro  
 Hac e sônjet e voan maro ;  
 Mes evel ma oun en em gavet ,  
 E deus din-me diguemennet  
 N'em boa nemet en em avanç ,  
 Hac em bije ar breferanç .  
 Qer buan diouc'h-tu , hep dalci ,  
 Oun diredet d'e saludi ,

Hac e ràn hirio güeladen ;  
Cetu aze eun obaden.

Me a meus bet clévet dija  
Meur a guilloq o cana ,  
Hac evit n'en dòn qet c'hoas còs ,  
E meus güelet meur a vleiz en nòs.

Eun den terrubl oc'h , var ho meno ;  
Mes piou a sònch déc'h ho credo ?  
Ni a voar penos o redet broyou  
En em zammer a varmaillou ,  
Hac e rër coll calz a amzer  
O conta eur bern a c'heyer.

C'hoant oc'h eus-hu-ta d'hor sponta  
Ha d'hor c'hass qüit hep netra ?  
Ni nomp qet sur prest da cedi ,  
Hac e ve ret demp procedi.  
Mar cedit ar plac'h-mâ gane ,  
Me gavo eun all d'ho toare ,  
Uuan hac a voar menaji ,  
Ha mont a ràn déc'h d'e brouvi.  
An deiz all e voan o chasseal ,  
E yis en ty en eur basseal ,  
Hac e d'oa uset eur c'houlouen  
Evit clasq eun tam còs spillen.  
Admirit eta pebes greg ,  
Uza eur c'houlouen a venneq  
Evit eur spillen dic'hroset ,  
Ha c'hoas ne voa qet bet cavet.

Mar doc'h bas-valan , comzit ouz onnez  
Da varc'hadour an allumettez ;  
Pe autramant , mar plich deoc'h ,  
Goulennit-y eta evidoc'h ;  
Hor plac'h-ni a zo en ty-mâ ,  
Roet e deus demp e fromessa ,  
Gant consatamant e zud :  
Clévit gante , n'int qet mud.

Seblantout a ra ouz ho clêvet,  
 E ve an affer decidet :  
 Ha mar dé güir qementse,  
 Ne qet me mui a réi dale.  
 Permettit din-ta eun nebeudie  
 Ma rìn brêmâ eur baleic,  
 Da c'houzout hac én zo en ty  
 Eur plac'h contant da zemezi.

*En eur bresanti eur Plac'h Yaouanq.*

Sellit eta amàn, va mignon ;  
 Homàn zo eur plac'h a fêçon :  
 Mar déo contant ha d'ho toare,  
 Bezit eta grêt evelse.

*Compliment da eur Plac'h Yaouanq.*

Bonjour deoc'h-hu, Plac'h coant,  
 Fleuren fresq, boqet charmant :  
 Certenamant n'en déo qet c'houi  
 A dle chom hep caout ho parti.  
 Plijet, goude ar goulennou,  
 E ve casset an embannou.  
 Hirio na ellomp qet dale ;  
 Eur vech all a zo adare.

Ma n'oc'h qet ervad contantet  
 Gant an objet zo presantet,  
 E zàn c'hoas da ober eur bale,  
 Da glasq unan a vo d'ho toare.

Holla ! ni n'en domp qet tud fall  
 Da zont da guemer tra eun all ;  
 Ar vreg-se a zo perc'hennet ;  
 Nemet bez e vez divorcet ;  
 Eus ar seurt-se mallig hini  
 Ne deuyo ac'hân ganeomp-ni.

*Da eun Intanvez.*

G. Arça eta Plac'h Yaouanq coant,  
 Petra eo eta ho santimant,  
 Pa velit ar re o devez bet

Prest adare da gaout fret?

Ma na garit hasta a fo,

E medoc'h en' risq da goll ho tro.

Va excusit, m'ho ped, maouez vad;

Permettet eo certen badinat :

Mes n'en deo qet éruet c'hoas

An hini a dle dont d'ho choas.

*R.* Mar güelit begou e boutou,

E velot souden e seüillou :

Me gred assur e zoc'h den habil,

Mes da viana e zoc'h difficil.

*G.* N'hon devezs tam ebet disprijet

An objet a ve demp presantet;

Hac evel ne zeus coz voutez

Na gaver dezi he farez,

Onnez ivez, aboues guedal,

-- Me a gred a gavo eur chauç all.

Ni n'en domp qet deut assur eviti,

Ha ne sönjomp qet a grenn enni,

Mes évit an hini a zo embannet,

..... e zeo hanvet;

Hac evit e designa ervat :

..... éo he zad.

Ne glasqit qet eta digarei,

Pa zéo guir e män en ho ty.

*R.* Sclér mad éo sur, pa expliqit,

Eus a behini e parlantit;

Mes ret éo goulen diouti

Ha contant éo da zemezi.

*Mont a ra da ober eur bale.*

Ouz an daul e meus hi cavet

Traüqilamant bras azcet,

Ha e deus lavaret din-me

Ne voar qet piou a zo azo.

Oh! va mignon, ar respont-se

A zo tout-a-fét d'hon doare :

Disquëz a ra e zê prudant,  
 Ha güir vestrez d'he zantimant.  
 Hac evel pa lavarfe c'hoas  
 Ne rofe qet e dorn da bep goas,  
 Mes hepqen nemet d'an hini  
 A zo bet destinet dezi;  
 Ennes ê just a zo amâ.  
 Ne broposàn qen nemetâ;  
 Rac-se eta, grit demp antren,  
 Coulz hac an oll eus va banden.

Oh! va mignon, na c'houi c'heus talant  
 Da drêi an traou d'ho santimant!  
 Mes gouzout a rit, an habilla  
 A ell ivez avichou fazia;  
 Rac-se eta, bremâ permett  
 Ma lavarìn en em dromplit.  
 Mar dê eus ar plac'h-se azeet  
 E zêo occupet ho speret;  
 Ha pa e deus roet ar respont-se  
 Ouz traou all sur e sônje,  
 Rac amâ e zeus en em gavet  
 Alies a dud d'hor güelet;  
 Joa vras meurbet hon eus diouto,  
 Gant gementse evel ato  
 Eo en em gavet qer just ha tra  
 Da veza primeri ar bara  
 Dre chanç gouscoude dec'h e voa deud  
 Ar meliner laer gant ar bleud;  
 Hirio eta me ranç poazat,  
 Hac ar plac'h-se ribottat;  
 Hac ouspen gementse c'hoas,  
 Dêi êo ive da rolla an toaz.  
 Rac-se n'oc'h eus qet a voyen  
 Da gaout hirio hor femelen.  
 Ma ne zeus qen ouz ho trêsa  
 Nemet primeri a vara,

Deut ganén-me oll a vanden  
 Da gundui ar femelen :  
 Ni hon eus eur zal vras prepalet,  
 Tapisset caer ha fleurachet,  
 Poazet bara, qig ha stripou,  
 Paste, fars-forn, goadiguennou :  
 Eun dol hir a zo bet savet  
 Evit ober demp eur banquet :  
 Na c'hedomp nemet ar plac'h neve  
 Evit festa mad Molarge.  
 Pa vezo deut, ni a rai frico,  
 Ni a gano hac a gonto.  
 Ac'hanta eta, va mignon,  
 Petra a lavar ho calon?

Qement a rit sur o pledi,  
 Em be c'hoant bras d'ho contanti;  
 Gouscoude e ve dirézon  
 Lezel va zy en abandon,  
 Rac certen éo evit merc'het  
 Ne qet és din da zivoeret,  
 Hac ispicial an hini  
 A fell déc'h da reqeti;  
 Mes c'houi a zo grêt ho labour,  
 Ha n'oc'h eus ezom a nep zicour  
 Nemet da gana, da youal,  
 Da fricotta ha da zançal.  
 Cetu amàn eur potr boujant,  
 Hac a dalvo déc'h qeit ha cant.

Bo! né qet da glasq ar seurt-so  
 On-me sur laqet da vale :  
 Tec'h alesse te, còs marmous,  
 Ni ne glascomp qet eur seurt mous.

Mar cavit ennes re dister  
 Evit dont da ober hoc'h affer,  
 Cetu amàn c'hoas eun all,  
 Hac evit ar güel n'éo qet fall.

Bonjour, dèc'h-hu, va den mad,  
 N'oc'h eus breman nemet tostât;  
 Me gred eo dre guriosite  
 Oc'h en em bresantet aze  
 Evit gûelet hor plac'h coant.  
 Hac evit choaz ho santimant;  
 Mes hon affer-ni zo da guenta,  
 Hac e fell d'emp e finissa.  
 Mar teuit amàn d'hon dale,  
 D'hon tro ni a ray dèc'h bale :  
 Ni ho paen, hervez ar c'his,  
 Certen gant ar memes moneiz.

Lavarit din-me, me ho ped,  
 Ha merc'hed ho prô zo decedet,  
 Ma ranqit eta dont qeit-mâ  
 Da glasq merc'hed da fortuna?  
 Me a gléo lavaret en Breiz  
 E zeus certen merc'hed aleiz;  
 Ma rafec'h eur bourmenaden,  
 Ec'h alfec'h gûelet meur a vanden,  
 Ha marteze abars fin ho tro,  
 Ho pe ar choaz eus anezo;  
 Evit amàn na zeus dicun  
 Contant da ober he fortun.

Lavarit din-me da guenta,  
 Petra a sinifi promessa?  
 Me a meus clévet en peb amzer  
 E tleer delc'hel mad d'ar guer;  
 Hoguen, unan eus ho merc'hed  
 E devez d'an den-màn promettet  
 Feiz qercoulz ha fidelite :  
 Ni zo deut da glasq an dra-ze.  
 Penos eta? me am boa credet  
 E voac'h, c'honi, eun den a vras speret :  
 Gûir eo, ar seurt-se avichou  
 O devez calz demeus a ureou.



*Quamdoque bonus  
Dormitat humerus.*

Ha credabl eo e ve en ty  
Eur plac'h contant da zemezi,  
Hac e ve ét qéit-se ar brud,  
Hep ma ouffe netra he zud!  
Pa ho clévan evelse o parlant,  
Me vel oc'h cus calz a dalant,  
Ha téod mad, ha descadurez,  
Ha calz inzigu ha mil adres;  
Ec'h ouzoc'h mad forji guéyer  
Evit tremen ervad an amzer,  
Hac e fell déc'h, gant ho latin,  
Hon amuzi-ni da c'hoarzin;  
Mes, hac e vec'h-hu avocat,  
Pa noc'h eus get déc'h ar gos vad,  
Me a esper dont d'o féza,  
Hac a c'hoarzo da ziveza.

*Ridebit bene*

*Qui ridebit in fine,*  
Abars ma refot din-me plega,  
E scuizot sur c'hoas en ho sa.  
Sellaouit ervad, va c'homper,  
Pec'het bras eo coll an amzer;  
Eur poent a zo evit pep tra,  
Ha bremàn eo poent finissa.  
Diou vech e meus bet goulennet  
Ac'hann ar plac'h a eured :  
C'hoas daou c'her all : diou vech anter;  
Decidemp buan an affer.  
Eur vech, diou vech, anfin, teir güeck;  
Cetu me bremàn direbech.  
Roit din-me bremàn ar plac'h,  
Pe e zàn en hent gant va zac'h.  
Ar banqet a zo preparet,  
Ha bezit sur e vo débret.

Goude qementse ni a velo  
 Pe c'houi pe me eo a baeo.

Ar pezh a ra din differi,  
 Eo an ezom eus anezi;  
 Rac ouspen ma zeo eur plac'h coant,  
 Leun a furnez hac a sqiant,  
 Eo dilijant en e labour,  
 En peb amzer prest d'am zicour;  
 Mes mar oc'h eus-hi decevet,  
 Ha dija en em bromettet,  
 Allas ! he c'halon a ve eno  
 Hac amàn a enep he meno.  
 Allòn, dont a ra em memor  
 Oc'h eus grêt din calz a enor  
 D'am pedi da vont d'ar banqet,  
 Hac oc'h eus bet memes pedet  
 Qement zo em c'hompagnunez  
 Da vonet ivez assambles.  
 Eh bien ! eno en eur banne güin  
 Me a veuzo va oll chagrin,  
 Hac a lavaro coulz hac eun all :  
 An affer-màn n'en deo qet fall ;  
 Rac-se, evit en em accordi,  
 Pa viot prest, deut-ta en ty.

*Compliment d'ar Vreg-Yaouanq.*

Debonjour dec'h-hu, Plac'h Nevez,  
 Me ho salud gant levenez.  
 N'en deo qet va c'hondition  
 Dont amàn dec'h-hu da sermon :  
 Lezel a dleer qementse  
 Gant an nep o deus autorite.  
 Mar plich ganec'h dont d'an ilis :  
 Eno ar béleg, hervez e ofiç,  
 A explico dec'h an oll zantelez  
 Demeus ar Sacramant a Briedelez,  
 Hac an oll obligationou

A contract ar güir priedou.

Me a meus grêt va c'hommission :  
Chanç vad dêc'h ha güir union.

*Complimant d'an Ozac'h-Yaouanq.*

Ha c'houi ive, va den prudent,  
A verit sur eur c'homplimant ;  
Me reqet dêc'h digant Doue  
Pep chanç-vad ha prosperite.  
Cetu dirazoc'h an objet  
Ha goulennet hac accordet :  
Mar dòn bet ouz ho retardi,  
Na gavit qet dies va excusi ;  
Gouzout a rit an usach commun  
Pa vez qestion eus ar fortun.  
Bremàn, mar doc'h prest, hastit a fo,  
Ne qet me mui ho taleo,  
Nemet ma rofot peb a vanne  
D'am c'hamaraded coulz ha dia-me.

#### DISCOURS EVIT GOULEN EUR PLAC'H DA EUREUJI.

Salud, Compagnunez, gant eur galon ardant,  
Eus a greiz va c'halon e ràn va c'homplimant,  
Ma vouifen-me an tu, ar fêçon d'en ober,  
E ve va brassa joa plijout d'hoc'h oll dousder.

Peb action gaër, d'e ober pa zeomp,  
E zêo dre Sin ar Groas atao e commançomp :  
En hano an Tad, ar Mab, hac ar Speret-Glan,  
Zo tri Ferson distinct en eur memes unan.

Abaoue ma voan bian, var brec'h va maguerez,  
Me am boa an desseign da antren er Palez ;  
Mes êru eo an deiz, an amzer ar vech-màn,  
Ma meus bet an enor da zont betec ennàn.  
Evit beza hirio antreet en ho ty,  
N'ouzoc'h qet, marteze, tenor va c'hevridi :  
Me zo eur messenger zo amàn digasset,

Cazi hep gout an hent, gant an Den a Eured.  
 Mes pa zòn digasset eus e bers ho pete,  
 Me a ray e excuz ha va hini ive.

Qent avanç davantach, e zàn d'en em adressi  
 Déc'h-hu, ô va Jesus! hor C'hrouer, hor Messi :  
 C'houi eta, va Jesus! a ray dîn ar speret  
 Da explica peb tra evel ma zeo dlect ;  
 C'houi a ray dîn ar c'hraç, pouvoar hac elocanç,  
 Sclérijen d'am speret da gomz en ho presanç.

Eh bien! plac'h yaouanq, n'em stringit d'an daoulin  
 Da c'houl bennos ho Tad qent mont da eureujin :  
 A beurs Doue an Tad e zeo demp ordrenet  
 N'ancounac'haimp qet nep o deus hor maguet.

Bennos Doue an Tad a c'houlân da guenta,  
 Güir Grouer eus an ên, Gouarner ar bed-mâ ;  
 Mes güelet a ràn c'hoas, pa remerçân ervad,  
 Penos e coe daëlou demeus ho taoulagad.

Ne qet ar pez oc'h eus grêt eo ho cra constrictet,  
 Mes güelet ho Tad, ho Mam, penos int desolet!  
 Allas! rêson o deus; n'en deo qet hep sujet,  
 Güelet e teuit da güittât nep en deus ho maguet,  
 Gant qement eus a soign savet bete vremâ,  
 Qementse a laqa o c'halon da rannâ.

Arça, Tad truezus, distroit ho taoulagad  
 Var ho merc'h ..... a c'houlen he mennat.  
 Emedi d'an daoulin dirazoc'h prosternet,  
 Deus a greiz e c'halon o c'houlen e souhet.  
 Ha c'houi, Mam dezolet, roit ho pennos ganti,  
 Gant ho merc'h ..... da eureuji. — *Ja, ia, ia.*

Holla ta! ..... avoalc'h é qementse :  
 Oboisset oc'h eus da C'hourc'hemennou Doue ;  
 Grêt oc'h eus ho tever gant güir humilite,  
 Ha Doue ne c'houlen nemet güir volonte.

Eh bien!..... plac'h fur ha disqet mad,  
 Avancit ho pasiou da vont betec ho Tad,  
 Ha roit deân daou boq eus a greiz ho calon,

Pa oc'h eus obtenet e venediction.

Distroit c'hoas eus ar Yam pini e deus ho canet,  
Ho livret da zemezi, pa oc'h eus er souhetet.

Qent avanç davantach, me c'houlen eviti  
Cònje he breur, e c'hoar, qent mont da eureuji,  
Paeron ha maeronez, mar e maint var ar plaç,  
Me c'houlen eviti ho pennos, diganeac'h.  
C'houi ho poa contractet en Ilis eviti,  
Hac hi c'houll ho pennos qent mont da eureuji;  
Bennos he oll ligne, cònje he oll c'herent,  
Cetu aze ar seul sujet ma zomp-ni deut en hent.  
Bennos ar re zo maro n'allàn qet da c'houlen,  
Rac calz a galonou contristet a laqfen,  
Güell e zeo eur beden d'ar re zo decedet,  
Eguet goul o c'hònje, pa ne maint mui er bød :  
Dre ze en ho pedàn da lavaret gane  
Ar salm eus an Ilis en repos d'o ene. *De profundis.*

Arça, compagnunez a zo amàn presant,  
Me zezir ar boneur d'ho renta oll contant;  
Me ne meus qet, sivoas, speret an oll æle,  
Da gontanti peb-unan hervez e volonte.  
M'am bije ar pouvoar en doa Alexandri,  
Pa voa bet prisonnier er guær eus a Vitri;  
Ennes a ziscare, gant moez e drompillou,  
Seiz muraill cimantet en dro da Jorico;  
P'otramant ar pouvoar en devoe Josue,  
A laze en combat seiz ha trégont Roue,  
A arrête an eol un heuranter en ær,  
Pa voa o combatti, evit rêi dezàn sclërder,  
P'otramant ar furnez en devoa Salomon,  
Pe an talantchou caër eus an doctor Ciceron,  
Me forchfe eun discours a vije d'ho souhet,  
Nonpas deus an anter ar pez a veritet.

Eh bien! compagnunez, en em rejouisset,  
Cetu bet demp an hini pini hor boamp deziret,  
Hac hi qer caër hac an de pe an eol ardent;

Hor c'halonou memes a rente oll contant.  
 Rac e hini e-unan a zo pareillamant guyè,  
 Evel ma ve an deillou er guez en fin mis maë :  
 Memes qen a sònch dia en devez a hirie,  
 E devez astennet deg vlavez eus va bue.  
 Graç deomp d'en em velet er pales celestiel :  
 En hano an Tad, ar Mab, hac ar Speret-Santel.  
 Eno gant hon Æl-mad ni vo represantet,  
 Pa vo ret renta cont dirac Salver ar bed ;  
 E vo lennet an decret, hep hor favorisàn :  
 Demeus o meritou e vo barnet pep-unan.

Mar e meus choqet den dre re a liberte,  
 E c'houlennàn mil excus digant ho majeste ;  
 Bet e meus ho cònje, gant ho permission,  
 Me ho trugareca deus a greiz va c'halon.  
 M'ho ped d'am asista evit e c'hundui,  
 Ma zefont gant enor d'e c'hass da eureuji.

*Rimou evit goulen ha réi Plac'het da eureuji.*

Orsus eta, compagnunez,  
 En em retirir oll a gostez,  
 Evit m'am bo an avantach da barlant  
 Amàn, en ho presañ, en langach eloquant.

Ne ouffen qet certen ober eur güelloc'h tra  
 Eguet dont da ober Sin ar Groas da guenta.

*In nomine Patris, et Filii,  
 Et Spiritus-Sancti.*

Ha neuze e lavaràn *Amen.*

Evit échui ervad va feden.

Debonjour ha joa en ty-màn :

N'en déo qet . . . . a chom amàn ?

Ia, va mignon, eun action vad oc'h eus grèt,  
 Dre Sin ar Groas pa zoc'h commancet ;  
 Me a ray ive coulz ha c'houi

*In nomine Patris, et Filii,*

Hac evit échui ervad va feden,

*Et Spiritus-Sancti. Amen.*

M'am bije gouezet e teujec'h hirio d'am gñelet,  
 M'em bije da fest preparet treid siliou, ha re arinquet,  
 Pévar gartier eur guellyenen,  
 Ha diou scouarn eur verrienen.

• Dont a ràn meurbet d'en em estoni,  
 Pa glévàn peguer caër fest ho poa d'emp da brepari;  
 Mes mar qirit dont dissul goude an oferen-bret,  
 Ni a breparo déc'h ivez eur banquet :  
 Ni hon eus laquet déc'h deus ar ber  
 Luz. alamandez, trinchin, mesper.  
 Hoc'h asistanç, mar plich déc'h, compagnunez,  
 Me ho ped da laquet meurbet eves,  
 Rac eur goall barti certain a velàn amàn ;  
 Mil aon a meus na golfen gantàn.

Eur groug-lassiq hor boa stignet,  
 Eur goulmic voenn hor boa trapet ;  
 Mes, allas ! ne voa qet goal gre,  
 Hac e zéò, sivoas dìn, achappet adarre.  
 E asqel glèi a zo torret, achap a bell ne alfe qet,  
 Hac hon eus clèvet lavaret e zé amàn eo disqennet.

Yaouanq òn sur er bed, ar c'hustumou n'ouzòn qet :  
 Rac me ne meus qet studiet evit goulen na rêi merc'het :  
 Mar deu dìn lavarat netra sot,  
 Mar plich ganéc'h em excuzot.

Dre ma zòn deut da dal an ty,  
 Ne garfen qet sur dont d'ho choqi,  
 Na d'ho repren, na d'ho facha ;  
 Rac certain an dra-ze a ve sur ar goassa.  
 Mes evit cavet tro da barlant,  
 Ma vo a propos va c'hompliment,  
 Excus ha pardon a c'houlennàn :  
 Pa blijo ganéc'h e comzìn bremàn.

Seblantout a rit beza habil,  
 Hervez ma velàn, eus ho pabill ;  
 Rac-se e carfen gouzout ouzoc'h  
 Petra a glasqit, ha piou oc'h.

**Me**, va mignon, a zo eun den yaouanq  
**Hac** a zo bas eus a sqiant ;  
**Mes**, mar dòn ignorant a dra sur,  
**N'en** dòn qet ignorant dre natur ;  
**Rac** ma noc'h eus qet anavezet va zad,  
**Me** a rayo dèc'h anavezout e vab.

**Ober** a rër dìn calz demeus a enor,  
**Güelet** eur seurt compagnunez etal va dor ;  
**Mes** ret eo dèc'h ervad lavaret dìn, va mignon,  
**Demeus** a betra e zeus qestion.

**Gant** ..... e zòn bet sortiet,  
**Demeus** a ..... dre e gared,  
**Da** c'houlen dezàn da zont da eureuji :  
 ..... a rër eus anezi.

**Tri** embann, va mignon, oc'h eus bet clèvet  
**A** zo bet lennet dissul gant ar bôleg ;  
**Ha** fennos, gant ar c'hraç a Zoue,  
**Hou** eus sònch mad da gass ar bêvare.  
**Mar** deuit, va mignon, bremàn d'hon rebuti,  
**Ni** ho laqay souden da gaout eun troatad fri,  
**Hac** e viot condaonet da baca an amand,  
**Ar** pez a gousto dèc'h eun nebeudic arc'hant.

**Va** mignon, na lavarit qet a c'hevier ;  
**Güell** eo dèc'h lavarat bremàn ho *Pater* ;  
**Rac** bremàn-sounn, dre abiou ho fri,  
**Me** a meus-hi güelet duont en penn an ty.

**Doue** en deus lavaret biscoas den en én n'éo antreet  
**Nemet** gant courach en defe combattet ;  
**Ha** c'houi, va mignon, n'ho po qet ho plac'h,  
**Na** renqfot disputi eur pennadic mad c'hoas.

**Glorius** en ho cavàn meurbet,  
**Va** mignon qer, gant ho merc'het ;  
**Ar** merc'het a zo goall bejou, hac a scò evel diaoulou.  
**Ha** pa doront o c'héyelou, e c'hoariont gant o inqinou.  
**Evidòn-me** a lavar crenn ;  
**Birviquen** en maouez ne fifen.



Ne ravodit qet va fenn din, autrone,  
 Diouz ar pezh a c'houlennit diganén-me;  
 Rac mar ho pe diganén-me tennet  
 Ar gaera demeus ar merc'het,  
 Goude diouzón-me c'houi a c'hoarzfe,  
 Hac el leal, réson mad ho pefe.

Ne grenàn, na ne chenchàn liou;  
 Ma n'am be qet ac'hann, me dremeno abiou:  
 Ma vemp-ni ganéc'h-hu refuset,  
 Ni a gavo el lec'h all merc'het.

C'hoarvezout a ra ganéc'h evel ar merdeadi,  
 A ya oll da naov heur da zèbri dijuni,  
 Ha goude e vent enpad an de neuze o naviga,  
 Allas! alies o clasq, e ranqont rabata.  
 Va mignon, na chommit qet aze d'ober brud,  
 Lipit breman ho peg hac hit buan d'ho clud.

Pa voac'h-hu éru gant an hent,  
 Me sònje din e voac'h eur vanden sent;  
 Mes breman e credàn a dra certain  
 E zoc'h eur vanden merc'hetaeryen.

Me a ya da zivoucla breman va boutou,  
 Evit mont da zispen va roudou;  
 Rac evit ac'hann, var a velàn,  
 N'hor bezo netra evit breman.

Mar doc'h attachet, en defot merchet,  
 Me a lavaro dec'h e pelec'h sur e qefet:  
 Mar qerit mont da vourg Plougouven,  
 E cafot eno eur plac'h evit eur grampoezen.

Sac'h ar bier! ar re-man afat a zo tud,  
 Coulz ar re vras har ar re vunut;  
 Evit qement a meus bet de lavaret,  
 Ne reont van ebet evit dont d'am c'hlévet.

Me a vel ervad e ranqàn sur plega,  
 Terri ha brec'h ha gar hep en em vlessa,  
 Ha dont d'e digass dec'h amàn da dal an nôr,  
 Da c'hout ha c'houi e recevo gant calz eus a enor,

*Presenti a r r eur Vreg.*

Cetu am n eur plac'h yaouanq  
 Hac e deus eur speret contant,  
 A zo diangach a bep lec'h,  
 Hac a dal hirio qeit ha dec'h.  
 Ha ma na d o qet mad d'ho cout,  
 Certen ec'h ellit mont en ho rout.

Ne douet n qet, va mignon coant,  
 E ve ho ty qen dibourve eus a blac'het yaouanq,  
 Na zisgasfac'h demp unan da velet,  
 Certenamant ne vezo qet refuset.  
 Mes houm n a zo an daill var he beg  
 Da veza  t pell zo d'ar vicher eus a vreg.  
 Me vel merqet var e chod cl i  
 E zeus bet goas o poqat d i :  
 Cassit-hi buen var he guis,  
 Gant aoun e defe drouc-avis.

Cl vet oc'h eus alies parlant,  
 O comz deus eur zal caer ha brillant :  
 Ia, va mignon ; me meus eur zal,  
 Hac a zo oll carguet demeus a draou leal :  
 A bep tu demeus an daou gostez,  
 Ne zeus nemet. accajou hac olifes ;  
 Ha dindan an treid, evit servicha da bave,  
 Ne zeus hepqen nemet lorenti ha lore.  
 Ia, ar zal gaer-m a zo dre oll decoret  
 Demeus a beder blanten gaera a ve cavet :  
 Unan e z o ar roz, eun all an tulipes,  
 Eun all ar palm superb, hac eun all ar cypr s.  
 Ha c'hoas ne meus contet d c'h netra  
 Evel e z n da gonta d c'h brem  :  
 En creiz ar zal-m n e zeus eur femelen  
 Demeus ar re gaera e veljot birviqen :  
 E muzellou a zo demeus a roz bordet ;  
 Michanq e z o onnes a fell d c'h da gavet.  
 Va mignon, gouzout a rit ervat,

Pa gaver an avel eo e rànqer güentat;  
 Ha c'houi, pa gafot discarg d'ho merc'het,  
 Me ho ped, mignonet, n'o refusit qet,  
 Ha c'hoas trugarecait Doue,  
 Pa na reomp eguis Table,  
 En devoa da ravissa ar merc'het  
 An devez memes demeus o eured.

Cetu amañ, eur plac'h yaouanq,  
 Zo qer caer hac an eol brillant;  
 E diou chod a zo ruz evel ar ros,  
 Distinguet evel an deiz diouz an nos.  
 E zal a zo qer caer hac ar c'hristal;  
 Laqat a ra calon mab da dridal:  
 Ha ma na blich qet homañ dec'h,  
 Na ouffen qet petra da ober dec'h.

Troublet meurbet eo va speret,  
 Pe eur banne re an; be evel,  
 Mar deo honnes ar femelen  
 A meus grêt anei ar goulen;  
 Mes ar plac'h-se, pa zeo deuet,  
 Ne deo qet da veza refuset.  
 Me a zo ive eun den yaouanq,  
 Hac a meus eur speret contant,  
 Hac a zo diangach en peb lec'h,  
 Hac a dalvez birio couz ha dec'h,  
 A laqayo va dorn en he hini,  
 Hac a yêl ganti da zemezi;  
 A ray outi peb contrat mad  
 Evel a eure e mam d'e zad:  
 A brometto dêi fidelite ha fe,  
 En qeit ha ma vln en bue;  
 A zalc'ho mad dêi bete mervel:  
 Ne ouffen qet lavarat güestl.

Arça eta, ma mignon qez,  
 Cedi a ràn ganec'h ar plac'h nevez;  
 Mont a ràn d'e digass dec'h d'an nôr:

Me ho ped d'he receo gant enor.  
 Didostait eta, den nevez,  
 Da guemer en dorn ho mestrez;  
 Evit rei dec'h an arvoenti,  
 Laqit ho torn en e hini,  
 Ha sonjit penos e pado  
 Ho commanant betec ar maro.  
 Na deut qet d'e goaldreti, d'e chasseal eus an ty,  
 Evel pa ne anefac'h qet anezi;  
 Pe m'er grit, va mignon, selaout mad eur guer:  
 Laqit ervat eves demeus ar goalinier,  
 Ar goalinier a zorn Doue oll-buissant  
 A bunisso ar re vechant;  
 Da lavaret eo, ar goalinier  
 Demeus e fulor hac e goler,  
 Pere a ellomp da evita,  
 O veva en graç Doue er bed-mâ.  
 Pedit Doue, Roue an Tron,  
 Da rey dec'h oll e venediction,  
 Ha da asista en hoc'h eured hirie,  
 Evel ma reas güechal en eured Cana en Galilee.  
 Tachit eta da gundui eur vuez vad,  
 Hervez Doue hac hervez ho stad,  
 Evit ma c'hefot gantân da repos  
 En fin deus ho puez en gloar Doue d'ar Barados.  
 Me a ya da laqat va zoq var va fenn,  
 Evel a dle ober peb christen,  
 Compagneuz, gant ho permission,  
 Pa meus grêt va dever ha va c'hommission.

## DISCOURS

*Da lavarat en gichen an ty da eur Goulen.*

Salud, tud a enor, gant peb soumission;  
 Tud eus a bep qalite hac a bep condition;  
 Ho ty hac ho madou, hac o tometiqet,

Hac ho polonte vad o devez va charmet.  
 Lavaret a ellàn hardi ne voa qet bet biscoas  
 Gant qement a blijadur oc'h antren en eur plaç.  
 Ho ty zo situet, qen tden, qen muraill,  
 Eur plaç a blijadur, n'en deo qet hep marvaill.  
 An nep en deus composet ar portret eus ho ty,  
 A zo eun den a speret, na fell qet din doueti.  
 Ne allet qet, va mignon, dont da baea ervat  
 Eun architect habil, ma na labour qet mat.  
 Me a zo bet o vale en calz eus a vroyou,  
 Hac e meus goneet nombr bras a victoriou :  
 Mes hor Zalver benignet a zo marvet er groas,  
 Qercoulz evit ar pinvidic evel evit ar paour, sivoas!  
 Eun amitie sincer e zeo va c'hevridi.

Eur femelen yaouanq zo maguet en ho ty,  
 Caret gant eun den yaouanq zo demeus ar c'hanton,  
 Hac a zo deut hirio an de d'e assignation.  
 E hano eo ..... brémàn n'el lavarin;  
 Mes me en lavaro qentoc'h ma finissin.  
 Prest òn da finissa hac ive da gommanç :  
 Mar parlantàn davantach, me am bezo setanç.  
 N'estimàn eur procuror o tifen e gojou,  
 Ma na c'hone e broces ha diunte ar gaou ;  
 Ha mar cavàn-me c'hoas teir güech en odianç,  
 En durant m'er selaouin me am bezo setanç,  
 Rac roue absolu òn, mar qirit va c'hredin ;  
 Pa c'houlàn va c'hevridi, e ranqit e réi din.

Me eo ar Roue Arthur, puissanç souveren,  
 Breiz-Izel en antier zo dindan va c'hourc'hemen ;  
 Ja, en assuranç, güir Roue ar Vretonet,  
 Hac Autrou en Breiz-Izel d'an Noblanç ha Princet.

Da guenta, evit commanç, Breiz zo din eu antier,  
 Montroulez ha Lanneur, Lannion, Landreguer,  
 Pontivi, Qemperle, bete güele Leon,  
 Castel-Lin, Forz-Louis, ar C'hroazic ha Crozon,  
 Ar Faouet ha Sant-Nic, Cast, Moelan, Poullaouen,

Ha Qemper-Caourantin, Castel-Pol, Lesneven,  
 Plestin, Garlan, Plouyan, Langonaval, Güimee,  
 Lomiquel, Plouezoc'h, Plouganou, Sant-Briec,  
 Guerlesquin ha Benac'h, Callac ha Qér-Ahes,  
 Plourin, Sant-Yau, Rosco ha Plouneour-Menez,  
 Hac ar guér a Roazon, elec'h ma chom bepret  
 Parlamant Breiz-Izel hac e brezidantet;  
 Ha Taule, ha Callot, Perros ha Lanvélec,  
 Lambal ha Sant-Malo, Lampaul, Sant-Thegonnee,  
 Pléiber-Christ, Comanna, Plougouven, Locquirec,  
 Conqerne, Ponabat, Lohuec, Carantec,  
 Pontréo, Plufur, Sant-Séo, Guiclan ha Pontmenou,  
 Plouaret, Enez-Vaz, Pont-Aven, ar Ponthou,  
 Plouescat, Plouizi, ha Castel-an-Taro,  
 Hac ar môr burzudus a ra dezo an dro;  
 Coatreven, Peder nec, Pempoul, Plégat-Güerand,  
 Hac anfin qement zo dindan ar firmamant.

Arça-ta, Plac'h yaouanq, va güir bried fidel,  
 Cetu c'houi Rouanez ebars en Breiz-Izel;  
 Cetu c'houi Rouanez var ar c'hériou hanvet:  
 Bezit eta contant eus ar fortun a ret.

Oh! saperlot! terrupla den oc'h, c'houi!  
 Studiet mad oc'h eus sur ho filosofi,  
 Hac e zêo certain impossibl déc'h manqout;  
 Mes me zo ignorant, n'ouzon netra en tout,  
 Nemet débri va yôd ha lipouzad va lèz,  
 Débri patattez, stripou, ha souben ar c'hrampoez,  
 Mes en eur gonta déc'h va nebeut talantchou,  
 Ne ouzon qet penos ec'h ancounac'hàn va rimou.

Debonjour déc'h-hu oll, tud a enor, pini  
 Zo deut a galon vad da guichennic ho ty,  
 Gant eur joa ar vrasa d'ho saludi bremàn:  
 Eus a greiz hor c'halon ni a zo deut amàn.  
 Saludi a reomp ractal ho personach,  
 Gant an oll respet a gommand ho pizach;  
 Hac er memes amzer hoc'h oll gompagnunez,

Rac assur tud vrao oc'h amàn assambles.

Me a fell din breman sur, va mignon,  
Gouzout eus a betra e zéo qestion  
Rac ma velàn eur seurt banden  
Eru da doull va dôr d'am zurpren.

N'en deo qet evit ho surprèn,  
Nac evit ober poan da zen  
E zomp amàn en em assamblet  
Evel ma ve eur vanden denved :  
Ni a zo o clasq da eureuji,  
Ha na ellet qet da ziferi,  
Dindan boan da bêa an amand,  
Hac ar mizou antieramant.  
Eun ouades am boa tennet,  
Hervez ma zeo demp rapportet,  
Disqennet e zeo en ho ty,  
Rac-se rentit-y deomp-ni :  
C'houi a renq renta deomp rêzon  
Demeus anezi, va mignon.

Ni zo e clasq eur plac'h yaouanq,  
Mar qirit ni e hanvo déc'h franchamant :  
He hano eo *Guillemet ar Maout*,  
Nac evit beza pried da *Charles ar Zaout*,  
Da zont d'an ilis da eureuji  
Evit échui an demezi,

*Guillemet* ne vouie qet  
E voa hiryo deiz he eured,  
Hac a zo êt d'ar vèlin da oza qerc'h :  
Rac-se reidit, mar qerit, var he lerc'h,  
Rac ar meliner a voar parlant  
Hac a ambus ar merc'het yaouanq.  
Aon a meus na rancac'h reir e gortoz,  
Abars mac'h êruo e vo noz.

M'am be ar bermission  
Da antren en ho ty, va mignon,  
Me lavarfe pront, hep diferi,

E penn ho tol va c'hevredi.  
 Pa voan éru e penn ar c'harz,  
 Me he c'hauaveas eus he c'hoarz;  
 Hac he c'hlévis o lavaret :  
 Eru é davidòn va muia caret.

P'on eus ho qüelet o tont da dal an ty,  
 E sònje din e voac'h eur vanden merdeadi  
 O vont da Vrest evit eun ambarqamant;  
 Pe zoudardet o clasq o lojamant;  
 Pe otramant eur vanden stoupérien  
 Eus a Scrignac, Locqueffret pe Berrien.

*Si clamabor et meditabor ut columba.*

Evelse e comzàn, pa ven o latina.  
 En han' Doue, n'hon daleit qet,  
 Rac ar sacrist a zo goel bresset;  
 Me sònch din eo eus a urz Sant Cripin,  
 Hac e car dijuni mintin.

Qer brao, qer coant oc'h eus comzet,  
 Va mignon qer, ho refusi n'allàn qet :  
 Me a ya da ober eun dro dre va zy,  
 Da c'hout a me gavo déc'h ho qevridi;  
 Ha pa rin-me eun dro var va zeul,  
 E teuy eun dra benac d'am heul.  
 Cetu amàn eur vaouez coant,  
 Ha ne deo na còs na yaouanq,  
 A dle ravissa ho speret  
 Gant he fresanq hac e guenet.

Ar vaouez-ze zo perc'hennet,  
 Emedi al liou var he beg :  
 Hac e deus bet choazet he far,  
 Ha ne ra fors piou zo var vâr.  
 Me a gred e deuz dija poazet  
 Eus an darbot he biziet :  
 Cassit-hy ganéc'h var he c'his,  
 Rac aon ne defe droug-aviz.

Terrubl meurbet oc'h dificil;



Va mignon , ho complimentant zo civil.  
 Cetu amàn eur plac'h yaouanq,  
 Hac e deus eur galon ardant,  
 Hac a dle plijout d'ho fantazi,  
 Pe oc'h dies da gontanti.

Ni hon eus-y diguemeret,  
 Ha ne get da veza refuset;  
 Pa vo èru an heur, mar car,  
 Ni zo prest da choas dêi he far.  
 Mes eun all a e'houlennomp c'hoas,  
 Hac a zo blesset en he scoaz.  
 He zervicher qercoulz hac hi;  
 Eru eo ar poent da zepari.

O presanti d'ec'h an objet  
 Pini oc'h eus dija goulennet,  
 Ouspen, ni a c'houlenn pardon,  
 Mar hon eus bet divizion.

Didostait ta, den a zevez,  
 Da ziguemeret ho mestrez;  
 Ni he ro d'ec'h a galon vad,  
 Gant c'ònje he mam hac he zad;  
 C'ònje he c'herent hac he lignez,  
 Da antren gan'ec'h en priedelez.

Pedit Jesus, Roue an Trou,  
 Da rêi d'ec'h e venediction,  
 Ha d'hoc'h asista evel a eure  
 En eured Cana en Galilee.

Cunduit eur vuez vat,  
 En doujanç Doue, hervez ho stat,  
 Ha goude monet da repos  
 Gant an Ælez er Barados.

Parlant a rit qen delicat  
 Evel pa vec'h eun avocat;  
 Ma vec'h pignet en eur gador,  
 E s'ònfet vec'h eur predicator.  
 Manific ec'h ouzoc'h cozeal

En hoc'h avantach ordinal.

Ganéc'h m'en em gav estonet,  
E qever an nôr êruet;  
Rac me a gavje d'éc'h-bu güell  
Chom en tu all d'ar porastel,  
Bete gouzout ha ni hor bije  
C'hoant d'ho receo amâ hirie.

Evel ma zoc'h tud a enor,  
Deut demeus a zirac va dôr;  
Ne fell qet din ho rebuti,  
Na qen nebeut dont d'ho choqi;  
Clêvet a garfen libramant  
Petra eo sur ho santimant.

Evit ne ellot qet ignori,  
Clêvit breman va c'hevredi:  
Me gonto d'éc'h a boent a boent  
Evit petra omp deut en hent  
Ha mar domp amân arrêtet,  
Ec'h ouzoc'h erfat ar sujet.

Achui rân va c'hompliment,  
Respontit din presantamant:  
Trois ho qein hac hit d'oc'h bent,  
M'ho cav qer sot breman ha qent;  
Reir e chommit d'ober demp brut:  
Torchit ho peg hac hit d'ho clud.

Hervez m'ho clévan o parlant,  
Oc'h eus dresset ho compliment:  
Me gred oc'h bet er c'hademi,  
P'otramant er philosophi.  
M'am be c'hoant doc'h antreteni,  
Me ho pedfe da antren en ty.

Clêvet a garfen ar rêson  
Deus a betra eo qestion,  
Pa ho quélân deut en eur vanden  
Da guichen hon ty d'hor surpren.

Eur joa vras a meus-me meurbet,

Compagnunez, ouz ho quälet,  
 Ha mui a meus certenamant  
 P'o clévan qer caer o parlant,  
 Rac ne deu demeus ho' qinou  
 Netra en oll nemet rimou;  
 C'houi c'heus grët ho tiscoursiou tout,  
 Birviquen ne elfec'h manqout;  
 C'houi c'heus eun ton qen eloqant,  
 Qen delicat ouzoc'h parlant,  
 Na oufen qet e pez féçon  
 Dont da gonta déc'h va réson.

Abars qement-mâ, va mignon,  
 E carfemp gout ho commission,  
 Hac e conféc'h demp ho toare,  
 Vit petra oc'h deut da vale.

Mar deo qementso d'ho souhet,  
 Ne vezot pell refuzet;  
 Oblijet omp vel ma zeo güir  
 Da ziscléria déc'h hon dezir.

C'hoant bras a meus en assuranc  
 Da gaout an enor eus ho presanc.

Grit buan dezàn azea,  
 Aoun a meus ne deu da simpla.  
 Roit eun taç hac eur voutaill  
 Da zigrassi mad e gorsaill.

### COMPLIMANT TOL.

**M**'ho suppli, compagnunez, da bresta ho silanc  
 Evit ma parlantin bremàn en ho presanc.  
 Gant enor, d'ho yec'het me a deu da eva,  
 Hac abeurs ar Vreg-Yaouanq en ho trugareçan,  
 Po c'heus bet ar vadelez d'he beza asistet  
 En devez a hirie ebars en he euret.  
 Hac evit oc'h oblija ec'h evin davantach.  
 Da yec'het nep zo roet gant Doue dêi evit partach.

D'ho yec'het, Greg-Yaouanq, eus a beurs ho pried;  
 Doue da rêi déc'h ar c'braç d'en em garout parfet,  
 Ha da rêi déc'h er hed-mâ qement a souhetet :  
 Me a reget déc'h c'hoas asistanç un Doue,  
 Evel güeachal en eured Cana en Galilee.  
 Me a ev d'ho yec'het oll eus a greiz va c'halon,  
 Doue da rêi demp oll e venedicïion.

Ne ancounac'haomp qet ive an anaon decedet,  
 Tad, mam, ha breur, ha c'hoar, contr, moerebezet,  
 P'o devez bet ar soign, pa voant en o bue,  
 Da zovetât da bepini ac'hanomp e zanve.

Chommit, compagnunez, pepini en e blaç,  
 Evit caout ar vadelez d'asista oll er graç.  
 P'on eus débret hac evet, trugarecaomp Doue  
 Da veza roet deomp-ni diouz hon necessite.

Excus-ta, compagnunez, a c'houlennân breman;  
 Rac aon n'am be qet plijet da speret peb-unan;  
 Gouscoude e cred din ne meus lavaret netra  
 Hac a choqfe nicun eus ar re zo amâ.

Me a ev d'ho yec'het oll eus a greiz va c'halon,  
 Quz ho pedi da zèbri ha da eva en ho discretion.  
 Chommit eta pepini qeit ma vo e volonte;  
 Me n'ôn qet deut amâ da rêi da zen e gönje.  
 Graç demp oll da vea brepret en joaüstet :  
 Doue da gonservo qement zo eus va c'hlévet;  
 Doue d'hor c'honservo amân var an douar :  
 Graç demp d'en em velet eun deiz ebars er gloar.

*Discours evit eun Eured.*

Salud déc'h, compagnunez, gant güir humilite,  
 Pa meus bet an hardisson da zont en ho pete.

Perac na meus-me qet eloqanç Ciceron,  
 P'otramant ar furnez en devoa Salomon!  
 Perac na meus-me qet guinou ha téod alaouret  
 Da barlant en ho presanç evel ma veritet!  
 Me zo deut amân hirio gant va c'hompagnunez,  
 Evit goulen ouzoc'h, mar be ho madelez,

Eur recit mad benac eus an deiz a hirie :  
 C'houi oc'h-unan a ell accordi din qementse.  
 Tennet hor boamp d'ar sord da glasq ar savanta,  
 Allas! hac e zeo diguezet gant an ignoranta :  
 Mes dre ho madelez, ho sqient, ho prudanç,  
 M'ho ped d'am excusi demeus va ignoranç.  
 Me a c'hoarve ganén-me evel ar stereden,  
 Pa deu an eol da bara a goll e sclérijen;  
 Me zo n'em gavet amàn evel en eur jardin  
 Güernisset eus a lore, a roz, a durcantin,  
 Rac en e greiz o zeus bet maguet eur femelen.  
 Brillantoc'h e-unan eguet ar gaëra fleuren.  
 Me garfe dont a benn da ellout he zurpren;  
 Va speret zo troublet, n'om qet evit compren.  
 Gant enor o saludàn an oll gompagnunez;  
 Peoc'h Doue d'ar re veo, d'an anaon silvidiguez.

*Brémàn ec'h antre da vit ar Plac'h.*

Salud d'éc'h, Plac'h-Yaonanq, demeus a bers Doue,  
 Me a zo deut d'ho cavet en devez a hirie,  
 Evit gouzout diganéc'h ha c'houi zo preparet  
 Da zont da effectui ar pezh a zo promettet.  
 Deut da c'houlén bennos eus ho tad hac ho mam,  
 Evit dre guementse beza dirac Doue divlam;  
 Rac dre e c'hourc'hemen en deveus ordrenet  
 Respeti dreist peb-unan nep ho deus hor maguet.

Sellet e meus en ty-mâ ha nep tra ne meus cavet  
 A guement am oblichfe da fournissa d'éc'h merc'het.  
 Disqueuzit d'emp eta brémâ ho contrajou  
 Hac er memes amzer ive hoc'h oll titrou,  
 Rac me anzav òn eun nebeudic incredul,  
 Rac va réson a meus evit bea dissimul,  
 Néo qet brao g'uelet Yan ar Maout  
 Gant eur bezel en craou ar zaout,  
 Eur pezh corn butun en e c'hinou,  
 Ha goall gaillaret oll e vragou.

Ni ne glascomp nemet eur vaouez,  
 Hac hor bezo ni assur abars paouez;  
 Rac goall difeçon eo güelet eur goas  
 O vont d'an ty forn gant e doas;  
 Ha dreist-oll, pa ya da oza e guerc'h,  
 E veler ar merc'het o redet var e lerc'h.

Eleal, emàn a zo eur potr lippet mad,  
 Coulz evel ma voa e vam hac e dad;  
 Rac e vam gôs coulz hac e vam iou  
 O devoa, a gredàn, peder vorzed o diou.

Me ho suppli, en graç, compagnunez,  
 Hac ho ped a galon da gaout ar vadelez,  
 Mar teufe din-me dont da vancout,  
 Deut d'am sicour dre hoc'h oll gallout.

*Pa êruer ouz an Daul.*

Arça, Compagnunez, mar teuàn d'oc'h arrêti,  
 Bezit ar vadelez da zont d'am excuzi.  
 Stouomp eta d'an daoulin da c'houlen ouz Doue  
 Ma teuyo d'hon abista en devez a hirie.

*Brémàn e taouliner.*

Doue oll buissant en ên evel en douar,  
 Ma meus hoc'h offancet, e meus eur güir glac'har:  
 Cetu me d'an douar dirazoc'h prosterneti,  
 Ma vo ho madelez accordi din eur reget.  
 Ho pennos, va Doue, eus ar pez a c'houlennàn,  
 Evel ho servicher a zo daoulinet amàn,  
 Evel goechall Sant Yan, pa vadeas hon Zalver,  
 A glévas en êr eur voez abeurs an Tad Eternel:  
 « Ennes e zêo va Mab, an hini muia caret;  
 » Va c'hraç ha va bennos a vo gantàn bepret. »

*Brémàn e sao hac e tistro eus ar guerent.*

Goude beza goulennet benediction Doue,  
 E felse dêi caout brémàn hini he zud ive:  
 Cetu ho merc'h d'an douar dirazoc'h prosternet,  
 O renta déc'h-hu hommach, evel ma zêo dleet:

Goude bennos ar Verc'hez, aroc mont eus an ty.  
 E c'houlen a vour galon diganec'h hoc'h hini :  
 Or ta ..... deus eta a vour galon  
 Da réy gant ho puguel ho penediction.

*Evit ar Yam.*

Ha c'houi, mam garantezus, pini deus he maguet,  
 Eur mennat a c'houlennan, ha n'am refusot qet :  
 Ho pennos a c'houlennan ganec'h evit ho puguel,  
 Evel a eure gñeachal ar Patriarch santel.  
 Bennos breudeur ha c'hoarezet ive pareillamant,  
 Hini paeron, maeronez, mar maint amàn presant,  
 Hini ar Zent, an Æles, hac hini ar gompagnumez  
 O dens grêt dêi, an enor d'e asista en e devez.  
 Ha brémàn demp, en hano santel a Zoue;  
 Goude renta hon hommach, oblijet omp da ze.

*Brémàn e ve lavaret eur Batez, eun Ave has eun  
 De Profundis, hac e saver er za.*

Savit ta, Merc'h Yaouanq, da zont da dy Doue,  
 Evit efectui en antier ho promesse,  
 Da virat fidelite bete fin ho pue,  
 Ha goude d'en em velet en barados Doue.

DISCOURS

*Pà roer eur Plac'h, hac evit echui tout.*

Qemerit, va mignon, eun nebeudic courach,  
 Rac êru oc'h souden er fin eus ho peach;  
 Ha ne c'houlennan qet mui nemeur a dermen,  
 Rac me vel eo êchu brémàn va zrajedien.  
 Me a garfe certen demeus a greiz va c'halon  
 Caout assur eun nebeut a gonsolation.  
 Didostait amàn en qichen d'an treujou,  
 Ha me a royo dec'h gant joa vras eur c'hélon

Pehini a ellàn credi certenamant  
 A rejouisso meurbet ho santimant ;  
 N'en déo qet eur c'hélou hep netra qen ,  
 Rac cetu amàn dirazoc'h suramant eur femelen  
 Pini a lavarac'h , va mignon ,  
 A blije meurbet bras d'ho calon.  
 Cetu amàn , me grêd , eur femelen  
 A zo caeroc'h eguet eur chinofen ,  
 Roz , na fourdilis , na levant :  
 Speret an oll a rent contact.  
 El lec'h ma ve tevalijen e laqa pep seurt sclêrijen :  
 Caer eo evel eur stereden , qer caer hac ar verelaouen.  
 Roit an dorn deo dezi brêmàn ,  
 D'e c'hass ganêc'h demeus an ty-màn :  
 Ha mar er grit , clévit eur guer :  
 Dioüallit eus ar goalinier  
 Eus a zorn Doue oll-buissant ,  
 Da bunissa an dud mechant.  
 Me a lavar ar goalinier  
 Eus e furor hac e goler ,  
 Da lavaret eo , ar c'hollou ,  
 Ha calz demeus a valeuriou  
 Pere a eller da evita  
 O veva gant graç Doue er bed-mâ.  
 Bevit bepret ho taou en doujanç Doue ,  
 Hac ho pezo certain peb seurt prosperite.  
 Pegument benac hep nep douetanç ,  
 Ec'h ouzoc'h mad qement-se en avanç.  
 Gant ho permission e lavarìn brêmàn  
 Ebars eur guer pe zaou , va zelaouit amàn :  
 Qemesqet eo , allas ! atao buez an den ,  
 Bepret demeus a joa hac a anqen ;  
 An tieguez zo eul lest ,  
 Exposet da veur a dempest :  
 Rei eo dêc'h beva en güir union ,  
 Ha Doue a roy dêc'h e venediction.



Peb den zo gant Doue choazet :  
 Evit beza eürus ha salvet.  
 Hogueñ ret eo goude goulen  
 Beva just en güir Gristenien.  
 Contemplit ar societe  
 A zo entre an douar hac an ðe ;  
 Goulennit bepret digant Doue  
 Courach ha nerz d'ho liberte  
 Evit ober peb tra parfet ,  
 Evit se e zoc'h digasset.  
 Return a ranqit adare  
 Da renta cont da eun Doue.  
 Gout a rit , ne zouetan qet  
 N'oc'h eus eun adversour er bed.  
 An adversour-ze eo Satan ,  
 Siouas deomp oll guittibunan !  
 Pa falvezo d'an droug-speret  
 Dont da debochi ho speret ,  
 Respontit : *Abrenuntio* ;  
 Ha lavarit : sinet eo.  
 An Autrou-Doue eo ar brassa ;  
 Enor ha gloar rentomp dezà ,  
 Evit goude beza labouret ,  
 Hervez hon nerz hac hor yec'het ,  
 Pa c'hefet divar an douar ,  
 E recevet eur gurunen er Gloar.  
 Ouspen , er goalen a eured  
 E zeo ar garante comprenet ;  
 Dre ma zêo rond ar voalen ,  
 Ne all finissa birviqen.  
 Ne zeus fors absolutant :  
 Ret mad eo da eun den parlant ;  
 Ma ne respontomp qet an dud ,  
 E teufent da lavarat e zomp mud.  
 Sönjet hon eus da ober voell ,  
 Sevel amàn eur zantinel ,

Hac a vo grèt en form eun ty,  
 Evit respont d'an dremenedi.  
 Ha c'houi ive, va mignon qez,  
 Mar oc'h eus marc'hadourez.  
 Pe da brena, pe da voerza,  
 Partiit buan gante da guenta,  
 Evit Montroulez pe Gastel,  
 Hac e profitot ne vo qet pell;  
 Eno e cafot honestamant  
 Peadra evit hoc'h arc'hant.  
 Eur garante evel honnes  
 Ne all qet finissa james.  
 Credi a ràn hoc'h eus pedet  
 Jesus hac e Vam beniguet.  
 Da asista en hoc'h eured.  
 Demp-ni bremàn, compagnunez,  
 Da offr hor peden assambles  
 Er sacrific an oferen,  
 Da c'houlen graçou souveren;  
 Hac evidomp hac evite,  
 Goulennomp graçou ouz Doue.  
 Er fin, o tont da finissa:  
 Dalit he dorn, croguit ennà;  
 Promettit dezi fidelite,  
 Hac hi a brometto dec'h ive.  
 Ceta aze he dorn deo  
 Doue dre e c'hraç d'ho cunduo.

FIN.

*Propriété.*



**DEVERIOU AN DAOU BRIED  
AN EIL EN ANDRET EGUILE.**

(Chabistr 6 eus ar C'hod Civil.)

An daou Bried a dle chom fidel an eil d'eguile, hac en em zicour an eil eguile.

An ozac'h a dle difen e vreg, hac ar' vreg senti ouz e he ozac'h.

Oblijet eo ar vreg da ober he demeuranç gant he ozac'h ha d'e heulia en qement lec'h ma caro chom.

An ozac'h a zo oblijet d'he diguemeret en e dy ha da furnissa dezi qement tra a zo red da gaout evit beva hac en em wisqa, hervez e c'halloud hac e stat.

Cetu aze ho teveriou :  
Dalc'hit mad dê da beb heuriou.  
Mar bezit fidel entrezoc'h,  
Ar Barados a c'honzoc'h.



**E Montroulez, e ty LÉDAN, e traon ru ar Vur.**

